

*Imprimé à Quimper, le 25 Juin 1843, de la
part de M. De la Villemarqué.*

KLEMVAN TRUEZUS

DIWAR-BENN

ANNA KOROLLER

EUS A DRÉBRIVAN, É PLOZÉVED,

LAZET GAND

IOUEN AR GOAER,

HÉ FRIED,

D'ANN UNEKVED DEIZ A VIZ MAÉ, ER BLOAZ 1841.

War don : Mari Ermanson.

I.

Va chalon em c'hreiz a venn ranna,
Hiriou ann deiz pa'z-éo red kana;
Pa'z-éo red d'in kana eunn torfed,
A rai d'hoc'h da grena, pa glêfet.

Iouen ar Goaer hen her gréaz
Mari-Jan Otret hen aliaz;

Anna hé c'hrek vad en deuz lazet,
O kemer hé vatez da bried;

Orged, mezventi, pinvidigez
Zo bet kiriek d'hé fallagriez.

II.

Annaik Koroller a gomzé
Ouz hé mamm-gaer fur, enn dévez-zé:

— Pellik zo em omp-ni dimézet,
Ha dinec'h awalc'h hon euz bévet;

Mes aboué 'ma Mari-Jan ama,
Ez éo éet ar peuc'h deuz ann ti-ma;

Na zell va gwaz ouz va bugalé,
Na zell mui out-hé 'vel a zellé;

Na zell ket mui ouz-in kenneubet ;
Ouz ar vatez , na lavarann ket.

— « Né ket red gwéla , va mere'hik kéaz ,
Ar vatez a vo laket er méaz ,
Ha neuzé ni a vévo dinec'h ,
Hag a teui ar peuc'h enn dro gan-hec'h. » —

Evid ar plac'h da véa kaset kuit ,
Na zistroaz ked ar peuc'h iskuit ;
Ar peuc'h enndro muiken na zeuaz ;
Ar vatez , o tistrei , a viraz.

Bragal a réé noz-dé barz ann ti ;
Noz-dé ann ozac'h enn tu gant-hi.

Ken a chifaz mamm louen Goaer ,
Hag a lavaraz d'ézhan dré gaer :

— « Ma em c'hredet , va mab , louen kez ,
C'hui lakai urz enn ho tiégez ;

Va c'hérent a zo tud a vrud vad ,
Kerkouls hag ho ré a-du ho tad :

Hogen aon em euz ken a grenann ,
Ema kollet hor brud-ni bréman ,

'Ma kollet inour hon tiégez
Abalamour da Jan , ho matez.

— « Mar ma hi kollet , kollet éma !
Chomm a rai Jan é-barz ann ti-ma :

Evid hoc'h-hu , na lavarann ket ;
Mont e-méaz rag éeun a ranket ! » —

Hag hen da stlenja hé vamm er méaz ,
Ha tré-béteg ter gwech hé filaz.

— « Ha bez' euz , va mab , ann hardison
Da skei gand ho mamm tré hé c'halon !

Tré ar galon é deuz ho maget ,
Ha da vlonsa'r vrec'h deuz ho touget !

Mar d-éo rigoliuz gwir ar roué ,
Rigoliuzoc'h c'hoaz éo gwir Doué. » —

*Le goudeec'ne
cite par fil*

Neuzé da glask eunn ti all a éaz,
Soublet hé fenn gand ann nec'h, siouaz!

III.

Né oa ket digouet é penn-ker all
Pa zeuaz ar plac'h enn eur vragal;
Ha chétu hi raktal da gana
Da gana pouil d'hé mestrez Anna.

— « Lévéret d'in, mestrez, ha c'hui iéi
Da ziwall c'hoaz al loar deuz ar bléi? »

— « Lévéret, Jan, hoc'h eunn, distak kaer,
Ha flemmet em hoc'h bet gand eunn aer? » —

Ar plac'h diroll ével pa glévaz,
'Vel eur vleizez tihet a skrijaz:

Hag a géméraz eur geuneudenn
Hag hé strinkaz gant-hi dré ar penn:

Ann ozac'h tostik, enn hé liors,
O c'huitellat kaer heb ober fors.

— « Arsa! va grek, pred éo mont da goan;
Naon em euz chetu ken ez ann gwan! » —

Pa oant ouz tól o tibri ho fred,
Hé c'halon gand ann nec'h oa sarret;

Ann dælou divéré deuz hé fenn
Pokenn ha pokenn enn hé soubenn;

Da danvât hé boed evel ma 'z-éaz
Ann ozac'h d'ar vatez a c'hoarzaz.

Ar c'henta loaiad é deuz tanvét,
Eur vlaz c'houéro enn hi deuz kavet;

Eur vlaz ker c'houéro ha ken espar,
Ken hé zôlaz d'ar chas d'ann douar;

Hogen ar chas n'ho deuz ket débret,
Goudé c'houésât, tec'hi ho deuz gret.

IV.

Eunn diou péder zizun goudé-zé,
Da gaout Person Plozéved ez-ée.

— Deued onn da govez, otrou Person ;
Tenn meurbed a zo war va c'halon.

Roit-hu d'in ann absolvenn zantel ;
Deued éo d'in ar pred ; red éo mervel.

— Va merc'h evit c'hoaz né varvoc'h ket ;
C'hui a zo c'hoaz é nerz hoc'h iec'hed ;
Penôz 'hallfé doué skei eur wézenn
Hag hi o vronsa c'hoaz evel-henn.

— Otrou Person, mé na nac'hann ket ;
Doué en deuz diwech na diwallet ;
Ar wech genta deuz ann ampoézon,
Ann eil deuz gwask-goug, otrou person ;
Doué en deuz diwech ma diwallet ;
Daoust hag hen rai a-benn ann derved ?

Panvet-han oa ma goad ieniet
Neihour c'hoaz zoken, gant ma fried.

Né oann ked em gwélé kousket-mad
Ma 'teuaz da glask ma mouga 'fad ;

Ha kement é waskaz war va goug,
Ken ez éaz ma fenn da gouéza moug.

Hen a gavaz gant-han oann maro ;
Ha mé béo c'hoaz, pa zeuaz enn-dro.

« Iouen kez, ho ped ouz-in trué !
Trué ouz ho kreg, enn han Doué !

Ken ez-inn warc'hoaz da govéza,
Da glask ann absolvenn divéza.

— » It da goveza heb koll amzer,
Manket onn diwech na rinn ket ter. »

plus que naturel

Hag er mintin-ma , pa oann parêt :
« Gret hoc'h euz ho sonj ? » En deuz laret.

— « Ha pé seurt sonj ambéfé-mé gret ?
Me chans , d'am laza né afac'h ket. »

— « Né ket sorc'hennou a larann d'hoc'h ;
N'am euz ket mui ezom ac'hanoc'h !

Mari-Jan a fell d'in da bried ;
It da govez ; mervel a zo red ! » —

Ar Person mad o sellet d'ann nec'h.
A groazaz hé zaouarn gand ann nec'h.

— « Hag halluz a vé , va merc'hik kez !
Pébez kalon griz ha didruez !

Red éo distroi prim da di ho mamm ,
Ha terc'het kuit iac'h ha flamm divlamm. » —

Anna koroller a lavaraz
Da di hé mamm dal'm'a tistroaz :

— « Ho ! na kaled éo va flanéden
Pé 'ma red mont mez deuz ti va den !

Pé 'ma red d'in kuitat Trébivan ,
O veza enn hi va c'halon wan !

Mé zonzé d'in ken na zimizez
E vijenn bet greg em ziégez ,
Padal onn gwas éged ar vatez ,
Gwas éged eur paourgez intanvez.

Va bugaligou mad , kénavo ,
Piou ho kunduo , piou ho savo ?

Glac'har vraz am euz pa ho kuitann ,
Enn desped d'am c'halon baour her grann.

Ar Werc'hez a roan d'hoc'h evit mamm ;
Ra ho miro deuz droug ha deuz nam ! » —

V.

Eis té 'ti hé mamm oa , pé war-dro ,
Pa erruaz eur baléer-bro.

— « Anna Koroller na ouzoc'h ket?
 E Trébrivan da valé 'm 'onn bet,
 Ha 'nétra mad na wèliz er ger,
 Német gadélez louz ha gwall skouer ;
 Hag é c'hleviz o vont biou ar pors,
 Ho pugaligou o krial fors ;
 Leun a zaelou druz ho daoulagad,
 Ar vatez war lerc'h oc'h ho c'hannat ;
 « Mamm baour! mammiñ baour! » hi a c'halvé;
 Ranna'ré ar galon ho c'hlevé. » —
 Né oa ket ar gomz peur achuet
 Anna Koroller a zo savet ;
 Hag hé bez er pinsin a lakaz
 Hag gober a euré sin-ar-groaz :
 — « Gwel éo gan-in beza dispennet
 'Vit klévet va bugalé kannet ; *une poble?*
 Gwel éo d'in, mil gwech, koll va buez
 Eget koll éné va merc'hed geiz.
 Kénavo d'hoc'h, mamm déner ha mad ;
 Héman éo va diveza kimiad ;
 Kénavo da draonien Josavad ;
 Eur c'hreg lazet onn, mé oar a-vad.
 Né varfenn med dré zord va fried ;
 Ma virfinn ar plac'h, na varfinn ket. » —
 Koulskoudé pa' zistroaz d'ar ger
 Iouen a chenchaz enn hé c'henver :
 War hé arbenn ez éaz Iouen,
 Gand eur stum ken drant ha ken laouen ;
 Ha c'hoarzin d'ezhi, gant komzou kaer :
 Pelléet ar vatez deuz ar ger ;
 Ken a vriataz hé bugalé
 Ar vamm joauz, o vont d'hé gwélé :
 — « Va bugalé, en em gonfortomp ;
 Erru éo ar joa enn-dro gan'éomp ;

Va c'halon a zigor hag a darz ,
 Evel ar bleuniou maé war ar c'harz. » —
 Allaz ! paour gez , ar bleun na bad ket ,
 Nag ar joaiou kalon kenneubet !
 Ken traitour d'hoc'h éma ho kwaz ;
 Evel ar mor pé 'vel ann targaz ;
 Pé ker sioul ar mor , pé ker glaz ,
 O fringal a lonk al listri braz ;
 Hag ann targaz pé ker flour hé vin ;
 Oc'h ober mitonik , a gravin .

Antronoz vintin , dimeuz a bell
 A oa klêvet eur vouez o c'hervel :
 — Iouen ar Goer deuet da wèlet :
 Ma ho kreg er c'hraou hag hi krouget !
 — « Mar d-éo krouget , beziet a vezo ;
 Ha goudé-zé mé a zimizo ;
 Mé zimizo gand va dous Jannet ;
 A-benn eur miz é vimp daou bried. »
 — « Né ket gand Jan é viot dimezet ,
 Gand ann Ankou na lavarann ket .
 Goulennet trué digant Doué ;
 Gwas hé varn éget barn ar roué ;
 Ra vo truésoc'h enn hoc'h andred ,
 Eged oec'h é kéver ho pried ;
 Pédi a ra évid hoc'h bréma
 Er baradoz é pélec'h éma. » —

VI.

Iouen ar Goer zo bet barnet
 Ha kondaonet da véa dibennet ;
 Hac ar plac'h kaset d'ar galéaou
 Evit ugent vloa , hep laret gaou .

D'ann unekved maé 'réant ann torfed,
 Daou vloa zo, enn noz, heb test é-bed;
 Er bloa-ma, tra estlammuz meu rbed!
 D'an unekved maé barnet int bet.
 Evit ar barner da vont goustad,
 Gred en deuz hé hent, ha gred er-vad.
 Né ked war ar Goer a wélimp;
 War hé vugalé 'ann hini rimp;
 Bugaligou baour emzivaded!
 Krouget ho mamm, ho zad dibennet!
 Pédomp Doué, breudeur kristenien,
 Ha roomp euun aluzen d'ar beorien,
 Ma plijo d'ann Otrou chilaou mad
 Pédennoù ar vamm évid an tad;
 Ma plijo d'ar Werc'hez inouret
 Kaout da grouadurien ar vinouret,
 Ma plijo d'hor Zent ober eur zell
 Eur zell a druez deuz Breiz-Izel,
 Ha mirout deuz droug ar Vrétoned,
 Evel kent, enn amzer da zonet!

Barz Nizon a zavaz
 Ar werz, hag hé skrivaz.

(De la Villemarqué)

